



# HISTOAR

## ADMIRABL

### DEMEUS AR BOUDEDEO,

*Pehini abaoue maro hor Zalver ne ra nemet bale  
nos ha deiz ac'han da fin ar bed, abalamour  
d'an affronteri en devoa bet en andret hor  
Zalver, pehini, pa voa o vont d'ar maro, e  
fallas dezàn disquiza var e stal, hac e teuas  
d'e rebuti evel ur scelerat.*

*Var ton : Guerz Santez Anna.*

---

**A**SISTANTET honorabl, didostait da glêvet  
Ur vuez ar pitoyaplâ, mar boe biscoas er bed,  
An histoar zo truezus demeus ar Boudedeo,  
Zo nos ha deiz o vale abaoue hor Zalver maro.

\*

Eus a tribu Nepthali, a guêr Jerusalem,  
Voa ganet Absarius, entetet, christenien;  
Dont a ra var ar bed-mân en amzer Herodes,

2  
A falvezas dezán massacri Jesus, mab ar Verc'hes.

\*  
Va zad a voa enr c'halvez, va mam qemenez,  
Hac a labourer eur templ ebars en broderez,  
Va c'herent am desgas da len leor al lezen,  
Hac iñi ar brofetet ive a dra terten.

\*  
Goude e voan demezet gant va c'herent d'ar fin,  
Da ur vreg fur ha prudant a d'ribu Benjamin,  
A behini em boe tri buguel d'an amzer ma teuas  
An Autrou sant Ian Badesour da brezec ar Messias.

\*  
Sant Ian a gontertissas cals deus a bayanet,  
Pere a voa idolatret, caledet er pec'het,  
Dec mil den en un deveas en deus het badezet,  
Me, va greg, va bugale e voamp bet o velet.

\*  
Va greg a lavaras din : va fried, emezi,  
Leqomp en ur vadezi, ennont eo ar Messi;  
Ha ne lavaret dezi, gant un ær direspect,  
Na ni nac hor bugale ne vimp get badezet.

\*  
Da hen un nebeut goude Sant Ian voe dibennet,  
Gant ar roue Herodes, un den cruel meurhet,  
Ha ma teuas hor Zalver evit reign en e blac,  
Hac a eure, dfe ar c'hanton, cals a viraclou bras.

\*  
Guelet emeus het Jesus alies o sermon,  
Hep ne meus het profitet eus e bredication;  
Va unan e voan presant p'en devoa rasaziet  
Dec mil den gant pemp bara ha goundese pesget.

\*  
Me, Bondedeo maleurus, a velas c'hoas

Jesus o ressuscita Lazar, breur Madalen ;  
Ha guelet dibossedi cals a dud possedet  
Ha, siquas din, pec'her bras nemeus tam profitet.



Da ben un nebeut goudese voe Jesus qemeret  
Gant cals deus a judevien er jardin Olivet,  
Ha condaonet gant Pilat neuze evit douguen  
Ar groas ponner ha mezus evit ar bec'herien.



Pa voa ar groas achuet, d'hor Zalver voe samet,  
Da vont da venez Calvar da veza crucifiet :  
O velet an dud o redec, me guemer va buguel,  
Ha me mont da dal an nor d'e velet o tremen.



Setu Jesus o tremen neuze abiou va zi,  
Pehini en tal va stal a deuas da reposi  
Ha me a laras dezàn, gant eur gomz arrogant ;  
Qe alesse eus va stal, te zo un den mechant.



Cannet oon disenoret gant da effronteri,  
Pa quelàn o reposi amàn e tal va zi :  
Qerz alesse, den ingrat, soroc'her hac'affronter ;  
Qerz alesse d'ar maro pa c'heus he meritet.



Jesus a respontas din, gant ur vouez truezus ;  
Mont a ràn da bartia, den fal, den maleurus ;  
Me riposo gant va Zad, te valeo bepret,  
E pevar c'horn ar bed-mâ, ac'han da fin ar bed.



Cetten te a valeb ac'han d'ar jujamant,  
Hac en tu deo d'am Zad am gouelo assuramant,  
O juji ar bec'herien pere vo condaonet

Da vont d'ar flamou gries, ar re just d'ar joaüstet.



Pa glêvis comzon Jesus, va c'halon voc touchet,  
Ma rois neuze souden va bugale d'am pried,  
Ma velis ar Véroniq o sec'hi fac Jesus,  
Ma chomas en he mouchouer e bortret truezus.



Hep gallout en em arrêti e heuillis hor Zalver,  
Ha ma velis va Jesus ha cals a c'hraguez santel,  
Ar bourrevien d'ar Verc'hes o deveus lavaret :  
Setu ama an tachoù ma vo ho Mab staguët.



P'am boa gulet hor Zalver o vervel var an gopas,  
E creis etre daou laer gant cals a boaniou bras,  
Ha me commanc va beach gant cals eus a anqen  
O tont da laret adieu da guær Jerusalem.



Comprenit oll, Bretonet peguement a c'hlac'har  
En deus ar Boudedeo bremàn var an douar.  
Ranqout quitat e gartier, e vreg, e vugale,  
Hep gallout e nep fêçon qimiada dioute.



Pa en devoa balect un nombr a zeveziou,  
E e'herruas en Ægypt, pell bras demeus e vro,  
Eno ema ar mor rû ma voa bet passeet  
Moyses gant pobl Doue hep caout drouc ebet.



Mont a ris eus ac'hane da enezen Candi,  
Elec'h emedi en noas an dud a so enni,  
Neuze e velis un stad o trec'hi a damou,  
E vèrc'h evit sacrific da rei d'e zoueour.

Mont a ris da Mal'hodo, elec'h ma zeus tud drol,  
Pere a ador Doue hac ive an diaoul;  
Tedi a reont Doue da rei de prosperite,  
Hac an diaoul a hedont na rei qet a zrouc de.

\*

Griet ameus er Japon ur vreg a voa cruel,  
Pini dehas da laza siouas he daou buguel,  
Er vro-ze eo permetet laza ar vugale,  
Pa n'en deus qet a vara o mam da rei deze.

\*

Goude e gemeris an hent da vont d'an Enezi,  
En Ameriq, en Afriq hac ive en Turki;  
Ar graguez eus ar vro-ze a ya tout d'an arme,  
Hac an ezac'h o deus spigu demeus ar vugale.

\*

Enon emedi ar c'his da laza ar hotret,  
Nemet unan e pep famil ne ve james miret.  
Bez'o deus eur rouanez a ro commandamant  
Da laza tout ar malet hep caouet d'e damant.

\*

Er ger eus a Ganior eus eur c'his drol meurbet,  
Car eno an dud yaouanq, pa vezont eureujet,  
E ranqo ar plac'h neve noz qenta he euret,  
Mont da gousqet gant ar princ vit beza enoret.

\*

Bet on ebars en ur c'hoad hanvet Cisaria,  
Elec'h ma eller bale cant leo d'an nebeuta  
Hep caouet dour da eva, na feunteun, na rivier,  
Ar pez zo incomod bras d'an dud zo er c'hartier.

\*

Monet a ris c'hoas pelloc'h d'ar ger a Vosopa,

Pini zo deus en divoal ar princ a so enna,  
 Eur vanden chass ha merc'hed en deus evit gardon,  
 Ha n'en deus qen soudardet evit difen e vro.



Ac'hane e c'his d'eur guær zo hanvet Estopet,  
 Elêc'h ma zeus serpentet ha loened vil meurbet,  
 Zo qen teo ha corf un den, sur ma vent mesuret,  
 O deveus d'an nebeuta, daou-uguent troatad het.



Er spas demens a gant vla ez on het o vale,  
 Ha me arruout adare em bro hac em c'hontre :  
 Ne velis pelloc'h eno na greg na bugale,  
 Na den ebet eus va bro certen n'em anavie.



Neuz e teus da Rom ebars en Itali,  
 En amzer-ze e voa calz eus a c'hlac'har enni,  
 E velis martiriza nombr bras a gristenien,  
 En defot na renoncent d'o feiz ha d'o lezen.



Me a vale var ar mor couls ha var an douar,  
 Ha me partia neuze da vont e Franc ractal :  
 E Marseil hac en Paris, e Naonet, e Leon,  
 Hag ac'hane da Vretagn d'ar guær eus a Roazon.



Guelet ameus Montroulez ne oa nemet ur c'hoad,  
 Ha guelet Brest ha Qemper ebars en douar p'fat,  
 Ha guelet ar guær a Is en e frosperite,  
 Hag ar gær a Lexebi a meus guelet ive.



Me ameus guelet Bretagn en coad ha meneziou,  
 Ma voa evel sovajet neuze ebars er vro ;

Brema me vel clierchamant ahaoue ma zon bet,  
Me a vel calz a gariou er vro-ze batisset.

\*

Me vel ar gar ar Roazon eur gar gaer batisset,  
E Dol hac e Sant-Malo, Dinan hac an Naonet,  
Sant-Briec ha Landreg'er, Lanuion Montroulez,  
Castel-Paol ha Lesneven ha Landerne ivez.

\*

Ar c'hariou ze meus guelet e eoad hac e prajou;  
Pa deuis d'ober va beach genta ebars er vro;  
Setu batisset Qemper, ha Brest, ha Recouvranc,  
Qemperle ha Kerahes ebars en assuranc.

\*

D'ar fin, pa zon condaonet gant Doue da vale,  
Me zo bet er em gavet bars e meur a arme;  
Canoliou ha fusuillou, clec na sabrennou,  
Nctra ne deo bet capabl da rei din ar maro.

\*

Bet on ebars e listri a zo bet perisset,  
Hac an dud a voa enne a meus guelet beuzet,  
Ha me hanvet Boudedco n'am bize drouc ebet,  
Comizqu Doue a renge bea accomplisset.

\*

Condaonet e zon gantan da chom var an douar,  
Comprenit oll, christenien, hemañ zo din glac har,  
Va zon manchou er bed-mâ bigen na finisso,  
Oen a Doue da varn ar bea hac ar maro.

\*

Ar som eus a bemp guenec so em godel bepret,  
James gant nep sort clêvet me ne don attaget;  
Bet on ebars en broyou elêc'h m'oa ar vocen,  
Hep na zeus staget ouzin na clêvet na angen.

\*

Va boutou na va dillad james na uzont get,  
 Dre bermission Doue am eus bet offancet ;  
 Peder guech am eus redet pêvar c'horn ar bed-màn,  
 Ha guelet am eus ive cals chenchamant eunàn.

\*

Brema ez en commencet da redec ar bempet.  
 Hep ne don ambarasset gant dibri na cousqet,  
 Guellet am eus bet broyou a so bet ruinet.  
 Ha cals demeus a gariou gant ar gurun dêvet.

\*

Ne meus get cals a amzer eviñ chom da barlant  
 Me a gred emâ va zreid var ar glaou ardant ;  
 Nan, ne neus nemet Doue a alfe disclêria  
 Ar hoaniou bras a zouffran evel ma repozan.

\*

Pebes malheur eo din-me da veza rebutet  
 Demeus a guichen va stal Jesus Salver ar bed,  
 Pa voa o vont d'ar maro da zont da zisquiza,  
 Ha me neuze dre valheur a zeuas d'e vepriza.

\*

Hemàn eo ar malheur bras e meus var ar bed-màn,  
 Emaon bepret o vale ouspen trivac'h cant vla,  
 Ha c'hoas e rangen bale ac'han da fin ar bed,  
 Pedit Doue evidon ma zin d'ar joatistet.

F I N.

E Montroulez, e ti LÉDAN, e traon ru ar Vur.